

CHANSON

AR FUMEREZET.

Var ton ar Parlament.

Digassit din liou-ha paper,
Ma laqin eun eur vanden
Bremâ souden var va c'hayer
Ar merc'het hac o fiben;
Rac dies bras go va speret,
O velet qement a verc'het
Pere a zong en o c'herc'hen
Corn butun ha liassen.

Mes evel ma zeo danjerus
Ur vaouz, pa ves faqhet,
E c'houleñnan ouzoc'h excus,
Merc'het, mar bezit choqet;
Rac bezit persuadet mat
O pezo bremâ ur slippat
Abalamour d'ho liassen
D'ho pütun ha d'ho pibep.

Va c'halon a douijeret
O velet ar viltapçou:

14. 11. 151.



Qement a zo ve sclabezet
 Pa sumont o c'horniadou ;
 Ha pa vezont ec'h oza'r yot ,
 Na vanq qet sur da gaout e lot ,
 Rac neuze' vezont e trein vat
 Da sumi ur c'horniedat .

Me a zo avis deoc'h , merc'het ,
 Da ober brinidennou
 Evit laqat var ho pruchet
 E plac ho mouchoquerou .
 Qementse ne gousto qet quer ,
 En un devez ur c'hemener
 A rayo meur a vriniden
 Da blom glaouren ar biben .
 Goaset , bezit ive difun
 Da brepar' ho liassen ,
 Da laqat an tamou butun
 A guefot en ho souben ;
 Rac m'en assur prédi boued ebet
 Ne vezo deoc'h-u preparet
 Hep en devezo e loden .
 Eus ar sustanç ar biben .
 Pa zit en un tu da bournen ,
 Ne ve qet drouc ho quelet
 O tispaqa ho liassen

Da rei d'ho commerezet.
 Va c'hommer, laqit ur c'horniat,
 Ar vech-mâ e meus butun mat :
 Pa vezø ar vlaguen gollo ,
 An ozac'h a Bourvezo.

Goude fumi , peur liessa ,
 E clèvan e ve sec'het ;
 Neuze n'em leqeont da lonqa
 Dour evel toulion göet.
 Ne qet soues bras o guelet.
 Gañt hidropisi deceđet :
 Coulz e ve dezo eva the ,
 Pe guin-ardant , pe gafe .

Mes ne zœus re qen disqempen
 Evel ar vaguerezet ;
 Unan a zo eus ar vanden
 E deus dëvet ne bruchet .
 Caer vezø deoc'h , bugaligou ,
 Mar guellit serri ho qinou ,
 Rac anez o pezo certen
 Lod a sustanç ar biben .

Guelet merc'het a zo esqis
 O fumi ur c'horniedat ;
 Coulz eo ganén guelet ur vis
 O neza ur gueyelat .

Un donjer eo guelet o-min,
Ha e'hoas e sonj d'an traou indign,
Pa vê'en o beg ur biben,
E vezont merc'het qempen.

Goaset, pa zit eus ho qêriou
Ne vanqit qet da guzet
Ho putun hac ho pibennou,
Potramant e viot slippet;
Rac pa deuyo dê c'hoant sumi,
Ne chommo corn abet en ty
Na vezo surlogoteat
Evit caout ur c'horniedat.

Mar deus, heryez an decrejou,
Commisseret er vro-mâ,
Da gonta ar chiminalou,
O deo labour da chifra:
Paqet viot, fumerezet,
Rac ret eo, herves an decret;
Paea divar peb chiminal
Tri scoët ha pêvar real.

Bremâ ive, merc'het yaouanq,
M'o laqaï er vreuriez,
Rac ne yeao'h qet sur contant
Ma n'o pe ho tñenes;
N'oc'h nemet plac'het divalo;

Dismeganç, fahlen, farç ar vro ;
 Ha ma na guitait ar butun,
 Sur e collot ho fortun.

Mes ne deus re qen etourdi
 Evel ar fumerezet ;
 Qentoc'h eguet chom hep sumi,
 E zaent da glasq o bouet.
 O ziez a vez dislogot,
 Rac n'o deus na bara , na yot ;
 A boan vras è dézo sq qen
 Gallout golo o c'hoç'hen.

Serychhereset , c'hui zo sclér ,
 A ranço mont diarc'hen ;
 Ho ejou a vezò dister
 Evit bourra ar vlaguen.
 Manifie e yiot evelse ,
 Scànvoc'h e yiot da vale ;
 Ha pa vezò lous an hentchou
 Na garget qet ho poutou.

Avoalç'h sur emeus caqetet
 Ar merc'het bac o fiben ;
 Ma na dint qet convertisset ,
 Int goassoc'h eguet payen.
 Rac se me ya da finissa ,
 Ouc'h o lezel var gyement-mâ .


Seſaouit attantivamānt
Va diveza complimānt.

Esper e meus , fumereset ,
Goude eur seurt prezeguen ,
E vezo ho calon touchet
Haç e reot pinijen ,
Laqit urz vad en ho tiez ,
Ha chenchit pelloc'h a vuez ,
Rac mar bezit re obstinet ,
E viot excumunuguet .

Ac'hanta ta , fumereset ,
Poan oc'h eus en ho calon ,
O velet quer brao qempennet
Hoc'h histor hac ho chanson !
Mes gemerit paciantet ,
Calz c'hoas a ve da lavaret
Evit echvi pen da ben
An histor eus ar biben .

Ar chanson-mâ so'composest
Gant daou gañfart disourci ;
Evit exerci' o speret
O deus great anezi ;
Ne qet dre intatition fall ,
Mes seulamant evit farçal
Hac evit ep' ema recrei :

Merc'het, dent d'o fardonf.



CHANSON
AR PLAC'HIC PAOUR HA EUR.

Var ton Fantic Coant.

Deiz mad dêc'h, Fantic Coant...
Mes pebes chenchamant !
Diveza m'ho qu'elis
E voa fresq' hoc'h invis ;
Mes abaoe, me gred,
Noc'h eus-hi qet chenchet.
Joa vras ameus ouzoc'h,
C'hoas em bije muioch',
Ma vije ho qenet.
Eun nebeut decoret
Eus a netadurez....
Pardonit, va mestrez.
Na ellân qet credi
E ve dre ziegui,
Qen nebeut supposi
E ve dre loustoni
O cuelan, plac'h yaouang

En holingeri fançais
Anzavit din hep mez
Doare ho tieuez.
Paourente zo calet,
Mes n'en deo qet pec'het:
Lavarit din hep adn
Ha c'houi a vanq a zaon.
Autrou , e ty va main.
Na gafet qet un tam ,
Nac arc'hant da brena ;
An draze zo goassa ;
Evelse n'en don qet
Da vezá tamallet.

Ne ve' cavet em zy
Nenret teir scudel pri ,
Teir loa goad , ur bodez ,
Ur podic da glasq lèz ,
Diou scaòn , un tabore ,
Ur bañq hac ur gueler .
Cavet e ve'ouspen
Un tamic chiaoudouren
Ur gos cramailleren ,
Trebez , pillic , pladenn ,
Evit oza crampocz ,
Mes npnpas alies .

C'hoas up c'hribinou mad ,
 Pa ve lin da gribat ,
 Daou gar evit neza ,
 Travouill da zibùna ,
 Tamouez da oza'r bleud ,
 Pa vez guerzet an neud .

N'on neus qet pemp guennec .
 Da gaout un tam blonec ,
 Nac un dornad olen
 Da zalla ar zouben ,
 Hac evit ober tan
 Hon eus ur garguic lann .

Cetu azé , autfou ,
 Invantor va guiriou .
 N'en deus qet er c'hontre .
 Ur plac'h qer papor ba me ;
 Mar clasquit ar madoù ,
 Chenchit tu d'ho pajou .

Var guementse , Fanctic ,
 N'en doc'h qet pinyidie ?
 Mes ho comzou , guirion
 A ravis va c'halon :
 Seulvi ma ho clèvàn ,
 Seulvuioc'h bo caran .

Me zo ur marc'hadour

Dre zouar'ha dre'zouir ;
 Me meus aout'hae arc'hant,
 Ha demeuranc' charmant,
 Gant sourci vras meublet,
 D'ho receo pa guerfet.

Tri pe bêvar bloas so
 E valean d'ær vro ;
 Evit clasq' ur pried,
 Ha n'em eus qet cavet
 Ini d'am zantimant,
 Nemedoc'h , plac'h prudant.

Lavarit din eta

Ha me a dle conta
 Da gaouit ar blijadur ,
 Dre voïeur dreist natur ,
 D'ho quelet oc'h orni
 Dre ho qenet va'zy ?

Mar bez contant va miam ,
 Me na zifferin tam.
 Dre vemes carante
 Deomp hon daou he bete ;
 Va c'halon zo mantrret
 Mar bec'h diséouvet.
 Deiz mad ; agreg kenorus ,
 Miam vad ; fur haec eurus ;

Mam d'eur verch' eporabl ;
 Caer, modest, agreabl ,
 Am bo evit pried ,
 Ma n'am refusit qet.

Birviqen, ne gredan ,
 Autrou, vec'h deut aman
 Evit ober goulen .
 Demeus eur vergeren
 A hep tra dibourve ,
 Sepet a burete.

Sellit e pes castel
 E chom'an demezel ;
 Guelit e peb costez
 Ar brassa paourcnez
 Evit ho tistréi
 Deus an nep' fantazi.
 Mam, eus ho tieguez
 Ein eus anaoudeguez ;
 Var guementse tevomp ,
 Hon tri en em glêvomp
 Da veva en hon ez
 Dre va finvidiguez.

Autrou, ne dleàn qet
 Refusi ho reqet ,
 Dre ho tisinteres.

Er choas eus ur vesfrêz,
E zoun sur e rentfet
Eurus va merc'h caret.

Dre o friedelez

Eurus voent assambles ;
Douçter ha yaouanhqis,
Modesti ha coantis
A zo guell avichou
Eguet an oll vadou.

CONCLUSION.

Dre'r zon-mâ e veler,
Var ar mèz hac en qêr,
E zeo ar barfetet
A blich mui d'ar voaset,
Rac-se , merc'het ar vro ,
Bezit modest ato ,
Hac e cavot pried ,
Evel ma teziret.

F I N.

E Montroulez , e ti LÉDAN.